

YF_0038_Choukomp dezi

Deom d'an unan tradiboudiboudiboudi
Deom d'an unan tradibouda

Choukom d'an unan tradiboudiboudiboudi
Choukom d'an unan tradibouda

Ficha ficha logodennig war ar bod war ar skod
Ficha ficha logodennig war ar bodig moan

War horre ha dindan war ar bod war ar skod
War horre ha dindan war ar bodig moan

Ficha ficha logodennig war ar bod war ar skod
Ficha ficha logodennig war ar bodig drein

War horre war al lein war ar bod war ar skod
War horre war al lein war ar bodig drein

C'hwi a zo eur vignorezig hag a zo karet
Ha deoh e vo lakaet voulouz e leh e lariat (lariat = laroh)

Diou a vo lakaet d'an traon, teir a vo lakaet d'an neh
Ma ne vez ket trawalh deoh e vo lakaet c'hwec'h

Pokit din ma dousig ha me a boko deoh
O! na larit ket d'ho mammig petra am-bo graet deoh

Daou-warn-ugent, pokit din ma dousig
C'hwec'h-warn-ugent pokit din-me eta!

Deom d'ar c'hwec'hved tradiboudib
Deom d'ar c'hwec'h tradibouda

Choukom d'ar c'hwec'h tradiboudib
Choukom d'ar c'hwec'h tradibouda

Doulbom d'ar c'hwec'h tradiboudib
Doulbom d'ar c'hwec'h tradibouda

Doulbom tenn tradiboudib
Doulbom tenn tradiboudib